



BUHEZ AN AUTROU
S. GUILLERM,

Duc a Guienne , Comt a Poitiers
ha Patron ar Penitantet.

Var ton Guerz ar Guernez.

VA sicourit , ô Speret Glan ,
Da ziscleria da bep unan ,
Ar vuhez ha conversion
Eus a Sant Guillerm va Phaëron.

Pa zeuer da gonsideri
Ar gommançamant anezi , ...
N'en deus den na ve estonet , •
O songeal penaos voe senchet.

An dra-mâ voe ur miracl bras
Da un den na re quen a gas ,

Buhez an Autroa

Eveus a Bap nac a Roue,
Voue gret servicher da Zoue.

Map voa da un Duc eus a Franç,
En devoa meurbet a chevanç,
Quement aon en doa rac e goll,
Ma el lefè ato en e roll.

Yaouanc voa pa varvas e Dat,
Ha neuse en em roas timat
Dar cheriou mat, dan debauchou,
Dar bordel ha dan tavargnou.

Quer cruel voa ha quen estranch
Ne zeue den en e bresanç,
A dal ma vise en e golter,
Na ranne o phen dre an anter.

Quer bras oa evei ur Geant,
Ha cruel evel un Tyrant,
Traitor memes d'e vignonet,
Den en e c'her ne fizie quet.

E creis ur solemnite vras
Priet e vreur a ravissas,
Tri bloas e joüissas anezi,
Goude he zaolas ermeas e di.

A houïarn ato voa armet,
 Na Roue , na Prinç na zouge quet
 Laquat an dut den em laza
 A voa tremen amfer deza.

Dre arrach ha dre malis
 E persecutas an Ilis ,
 Ma renquas ar Pap dont e Franç ,
 Evit tec'het rac e buissanc.

Elec'h Innoçant , Anaclet ,
 A laquas hep mar ebet ,
 Da Bap dre e autorite ,
 Dre e c'hallout ha cruaute.

Discleriet voe da Heretic ,
 Discleriet voe da Schismatic ,
 Gant ar Pap voe excumunuguet ,
 Ermeas an Ilis voe taolet.

En ur goler e antreas ,
 Hac an Escop a chasseas ,
 Ha confisca e oll madou
 Da lacat en e densoriou.

Da glasq e lacat en hent mat ,
 Sant Bernard a gueras timat ,

6 *Buhez an Autrou*
D'e gaout , d'e gconvertissa ,
Mæs e laza a fallas dezâ.

Anfin gant Doue inspiret ,
Ar Sant a yas da guemeret
Ar Sacramant eus an Auter ,
Ha d'e zouguen dre zrouc amser
Ar Sant gantâ ar Sacramant ,
A zeugas da rancontr an Tyrant ,
Hac a gomsas en ur fæçon ,
Ne voe quet nebeut e eston.

Ar c'homfou-man a lavaras ,
Te so goas evit Judas ;
Persecuteur out dan Ilis ,
Diabolic e da valis.

Ar Pab endeus da supliet ,
Ha ny oll hon eus da bedet ,
Ha n'on eus obtenet netra
Evit Jesus gra'ta un dra.

Etre va daouarn e talc'hân ,
An hini a varno ar bed-man ,
An hini a so da Zoue ,
Ta Dat , ta Salver , ta Roue.

An hini en deus da brenet ,
Gant ar Goat en deveus scuillet ,
Ha da gondaouno evit mat ,
A so dirac da zaoulagat.

Avis ha te er refuso ,
Rac evidout ezeo maro ?
Deus prest eta a vir galon ,
Deus da c'houlen ounta pardon.

Neuse souden dre Miracl bras ,
Voar e faç dan douar e couefas ,
Ha quen terribl voe e estlam
Ma couese ato a nevez flam.

Anfin pardon a c'houlennas ,
Hac hor Salver er pardonas ,
Voar e zaoulin en em laquas ,
Heman so ur chenchamant bras.

Quent voa ul Leon arraget ,
Ha breman ezeo douç meurbet ;
Dirac Doue ezeo un Oan ,
Hac exempl mat da bep unan.

Va Doue , emezan , ho pet truez
Me ho ped dre ho madelez ,

8 *Buhez an Autrou*

O pet truez ouc'h ur paour quæs ,
En deus oc'h offancet alies.

Na antreit quet e jugeamant ,
Pe collet oun assuramant.

N'en deus den quer sантel er bet ,
Mar quirit na vez daounet.

Resolvet oun bete ar maro
Da ober pinigen garo ,
Eveus va buhez debordet
Ha va fec'hejou commetet.

Mont a ras da gaout un Hermit ,
Un den sантel hac a verit ,
En disposas dan absolven ,
Hac a roas dezan pinigen.

An Hermit dezan a lavaras ,
Gret oc'heus tri feurt pec'het bras ,
Teir sort pinigen a so ret
Mar fell deoc'h beza pardonet ,

Madou an Ilis oc'heus laëret ,
Ho c'hoar gaër oc'heus violet ,
Ha laza hep truez ebet ,
Ande ar re-man tri fec'het ?

Evit ar pez oc'heus laëret ,
 Oc'h oll madou prest a rofet
 Dar paour hac a bedo Jesus ,
 Ma vezo ouzoc'h truezus.

Evit ho c'hoar so violet ,
 Ur rochet rust prest a zoucfet ,
 Breman hac oll het ho puez ,
 Ha yun bemdez a reot ives.

Evit ar muntrou oc'heus gret ,
 Un dillat houarn a guisqfet ,
 Voar ho croc'hen noas a zoucfet ,
 Ha bête ar maro a zalc'hfet.

Ouspen ezoc'h scumunuguet ,
 Rac-se prest da Rom e zeet ,
 Da c'houlen pardon ouz ar Pap ,
 Recevet vihot evel e Vap.

E Rom evel ma c'hantreas ,
 Da dreit ar Pab en em daolas ,
 Aben teir gueich voa refuset ,
 Hac ar Pab n'er pardonne quet.

Er fin ar Pab gant truez bras
 Da Jerusalem er c'hassas ,

Buhez an Autrou

Hac eno e voe absolvet
Eus e oll casiou reservet.

En un toul moguer voa nao blosas
Oc'h ober ur binigen vras ,
Voar ar men calet e couisque ,
Dour ha bara a guemere.

Clasquet voe gant an dut eus e di
O clasq songeal e zistrei ,
Pa ne allent e resolvi ,
O deus songet e anlevi.

E dre o fæçon e quittas
Ha dan désert prest e tec'has ,
Hac eno hep beza troublet ,
Ec'heure pinigen galet.

Ar plac-se quent a voa carguet
A loënet gouëz ha serpentet ,
Mæs abaoue ma c'hantreas
Nicun anezo ne flachas.

Sur un horrol bras oa clevet
An trous a rea an drouc-speret ,
Lies bemdeis oc'h e sponta ,
O clasq dont a benn aneza.

Avisiou evel ur plac'h coant ,
Avisiou evel ur serpant ,
Hac evel ul leon e furi ,
E rea feblant d'e zevori.

Cannet voe gantan quer cruel ,
Ma voe darbet dezan mervel ,
Ar Verc'hes en ur douch ountan
A eure salo anezan.

Quen admirabl voa e vûhez
Ma teue ar bopl hac an Ælez
D'e servicha ha d'e velet
D'e bidi ha d'e zarempret.

Ar Rouanez hac ar Princet ,
A zigace hep mar ebet ,
Da gaout da bidi Jefus
Ma vise outo truezus.

Sant Guillerm dre e exempl mat
A obligeas cals da guittat ,
Da guittat bombançou ar bed ,
Ha d'en em renta Hermitet.

S. Guillerm gant e bedennou
A rea cals a Viraclou ;

E zorn a voa ur guir remet
Da vellaat da bep feurt clènvet.

E Chatillon e hostises
A zeuas da goll he buez ,
Sant Guillerm he ressuscitas ,
Ande aman ur miracl bras ?

Lamp ar Sacramant an Ilis ,
Satan e zorras dre malis ,
An oll Eol dan douar a scuillas ,
An tan dre arraich a lazas.

Ar Sant en ur pidi Doue ,
A zeuas da laquat adarre ,
Al Lamp en ur pez , hac an tan
A allumas anezan e hunan.

Hac ouspen Prophet voa ive ,
Alies dan dut e lavare ,
Ober guir binigen abret ,
Peautramant e voant collet.

Da un Doctor e lavaras
Va den , grit prest pinigen vras ,
Ebars un heur ezoc'h maro ,
Pedit Doue , hastit affo.

Er fin pa oa coz meurbet ,
E teuas dezan ur c'hlènvet ,
E avertisset gant un Æl ,
A santas e voa poent mervel.
Dirac ar Sent ha Santeset ,
Etre daouarn Salver ar bet ,
E teuas da renta e Ene
Ha da bignat gantâ en Eê.

Pemp cant bloas so pe var an dro ,
Abas eo Sant Guillerm maro ,
Gant ar Pap voe canoniset ,

Ar Pap Celestin II en deus- èn canoniset en
amser ma voa Roue e Franç LOUIS VII a hano.

E renc ar Sent e voe laquet.
E Malevel ur Guer a Franç ,

[Ar Guer-se a so e Bourgogne.]

Ema e Gorf en assuranc ,
Ema e Bez hac e Ilis ,
Hac eno er peder bemdeis.

Marié gracie hostis

14 . *Buhez an Autrou*

Ar plaç ma zeo bet enterret ,
 Gant ur bopl bras so frequentet ,
 Abalamour dar burzudou
 A ra eno bemdeis c'houlou.

An dut dal odeus ar guelet ,
 Hac an dut bouzar ar c'hlevet ,
 An dut impotant ar c'herfet ,
 Hac an dut clàñ odeus yec'het.

Bref den tout n'en da d'e di
 Na deu ar Sant d'e gonsoli ,
 Ha da bidi Salver ar bet
 Da accordi dézan e requet.

Guir Patron ar Benitantet ,
 Truez ouzomp-ni quemeret ,
 En han Doue evidomp pedit ,
 Ma vimp salvet dre ho merit.

A M E N.

Aut pœnitendum in hoc sæculo.

Aut pœnitendum in futuro